


PETRA 'VEZO

AN DEVEZ VARC'HOAZ ?...



KEMPER

MOULLET E TI DE KERANGAL

1904

Petra 'vezo an devez varc'hoaz ?...

Paotred ar *Stroll* « le Bloc » a ia buan araog.
Oh ! ne ket avad evit mad al labourerien a zo kement a reuz varnho.

Ouspenn ugent vloaz zo, eur rumm deputeed euz ar gostezen vad ho deuz goulennet ma vije roet ho « *Retraite* » d'al labourerien deuet var an oad.

Ouspenn ugent vloaz zo, ne eanont da c'houlenn ma vo sonj euz ar re ho deuz uzet ho zamm buez e labouriou tenn.

Hag ato, ato, *ar re ruz* a ra ar skouarn vouzar. Ma kaver, en ho zouez, hiniennou hag ho deuz c'hoant da zewel ho mouez evit mad al labourerien, ho « *c'hon-sorted* » a ra varnho an arao, hag a daol dezho en ho daoulagad an hano a « *drubarderien* », an hano a « *draïtourien* ».

Ar framasoned ne velont nemed eun dra dirag ho daoulagad ; evit'ho n'euz er bed-man nemed eun dra neseser : *ar brezel d'ar veleien*.

Ar bobl en devezo labour gortoz ! Promesaou ne vanko ket dezhan, dreist-holl da vare an eleksionou.

Pe seurt vad a ra dezhan ar promesaou ?

Lavaret zo dezhan e vije ingalet etre al labourerien danvez ar venac'h.

Red e oa eta skei var ar venac'h. Siouaz ! ar brezel



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2026

great dezho n'en deuz ket lakeat eur guenneg muioc'h e godel ar bobl. Ar c'hontrol-beo eo a zo c'hoarvezet : en eur zerra skoliou ar frered hag ar zeurezed, — skoliou ha ne oa roll ebed da baea evitho — paotred ar *Stroll* ho deuz goanet ar vro ; he lakeat ho deuz da zispign ouspenn *pemp kant million* !

N'euz ket, er bed-holl, eur vro hag e ve ken pounner ar c'hargou ennhi hag hor bro-ni. Mad ! setu koulskoude kargou pounnerroc'h c'hoaz abarz pell.

— Poagn, paour-keaz labourer ! poagn ken a zivero ar c'huezen euz da dal. Ha goudeze, digor da ialc'h, eb lavaret grig.

Kredi rez marteze e teui ar zikour divezatoc'h ? — Sikour ebed evit al labourerien !

Te lavaro marteze : ne rear eta neuze labour ebed en hor bro ? — Eo, ober a rear labour an diaoul. Stlapa rear er meaz Frered ha Seurezed, tud savet en hon touez, tud hag a zo euz hor c'heranchou, tud ha ne reent nemed vad d'ar vugale. D'an deiz a hirio emaint kazi holl stlapet var ar ru, emaint kaset e meaz ar vro.

Ha setu aze ar pezh a c'halver « *Liberté* » ha « *Fraternité* ! »

Eneb ar Relijion.

Diskaret ar venac'h, kaset kuit frered ha seurezed, setu deuet tro ar Pab, tro an eskibien hag ar veleien. Outho holl eo a glasker hirio affer.

Eur pennad zo dija, e oa sonet glaz d'ar Relijion, e Kambr an deputeed.

— D'ar Relijion gatholik eo a fell deomp ober lamm, a levere an depute framason Viviani, pa oar o kommanz gant ar Relijiused.

Oc'h he glevet, *ar re ruz* a dride gant ar joa, hag a strake ho daouarn !

Hag ar bobl, petra zonz ? Daout ha c'hoant en deuz da velet ar Relijion diskaret ?

Ne gredan ket.

Ar goasa zo, ar bobl ne vel ket da beleac'h emomp o vont.

Ne oar ket e pe seurt stad trist en em gavo abenn nebeut miziou ac'hann. C'hoant en do da lakaat badeza ar vugale, da lakaat enterri an dud varo. Siouaz ! ne ket lavaret e halfe ober.

Taolit evez ! Digorit ho taoulagad ! Diouallit da ober ar skouarn vouzar, va zud vad. Setu ar pezh hor beuz da lavaret deoc'h, evit hoc'h henchha. Ni ive zo divar ar meaz ; hon tud e oa labourerien. Dishenvel euz kalz all, ni n'hor beuz mez ebed o tifen feiz hon tadou koz, n'hor beuz morse troet kein da Zoue, n'hor beuz morse tromplet den ebed.

Dao d'ar penn :

A boan ma oa votet al lezen judaz eneb ar Frered hag ar Zeurezed, a boan ma oa diskleriet ne oant mad da netra.

— Setu aze eun affer achu, eme Comb ; breman dao d'ar penn, stagomp d'ar Pab !

Ha penaoz ? Var be seurt digarez ?

Ne ket eaz gouzout. Kazetennoù ruz ho deuz embanet eo ar Pab en deuz klasket ober brezel d'ar Republik.

Gevier, ha netra ken.

Setu aman, e daou c'her, petra zo c'harvezet.

An distag.

Daou eskob e Franz e oa brudet fall. Souezet oc'h ! Me n'on ket ; ar c'hontrol eo.

An Eskibien zo choazet gant ar gouarnamant framason. Ne ket souezuz eta e teufe, guech pe vech, ar framasoned da choaz evit eskob eun den ha ne ket din euz eur seurt karg.

Ne espernont netra evit trompla ar Pab, hag eur mirakl eo, pa ne ve ket tromplet aliesoc'h.

Daou eskob eta — eskob Dijon hag eskob Laval — a lake kaozeal divar ho fenn.

Ar pezh a damallet dezho ne zelle ket euz ar gouarnamant, p'e guir ne ient ket eneb lezen ar vro.

Ar pezh a damallet dezho ne zelle nemed euz ho c'houstonz, hag ar gouarnamant nag he varnerien n'ho deuz netra da velet e koustonz an den.

Ar Pab avad e oa he affer gullet petra oa a nevez : rag hen zo, aberz Doue, ar Penn en Iliz, ha Tad spiriuel an Eskibien.

Skriva ra eta d'an daou eskob, evit ho gervel da vont da Rom. Rag morse ar Pab ne zeu da gondaoni den eb he zelaou.

Ne ra ket evel ar Framasoned. Ar re-man ho deuz roget ar C'hontred a zo etre Rom hag hor Bro ; tenet ho deuz ho fae digant meur a vil den a iliz, Eskibien ha beleien. Ha kement-se holl, eb lavaret dezho perag e oant skoet.

Mad ! gullet daou Eskob galvet da vont da Rom : setu aze an digarez en deuz klasket Comb evit mont en affer euz ar Pab.

— Mont a rit eneb ar C'hontred — ar *C'honcordat* —, emezhan d'ar Pab. Difen hoc'h euz da skriva d'an Eskibien, eb asant ar gouarnamant.

— Abaoue pedavare ? eme ar Pab. Er *C'honcordat* n'euz hano ebed euz eur seurt difen.

— Eo. An difen-ze zo embannet gant al lezen a rear « *Articles organiques* » anezhi.

— Al lezen-ze, eme adarre ar Pab, ne ket eul lezen eo. Biskoaz ar pezh a c'halvet « *Articles organiques* » n'eo bet asantet gant Rom. Ne hallit ket lakaat ar Pab da blega da eur C'hontred ha n'en deuz ket sinet.

Petra lavarfec'h euz an dra-man ? Jakez ha Iann a ra *bail* etrezho. Eur vech great ha sinet ar *bail*, Jakez a verk *mil lur*, eleac'h *eiz kant lur* — hag an dra-ze eb gouzout dare da Iann.

Daoust ha Iann a dle paea *mil lur* ?

Nan a dra-zur, rag n'en deuz sinet nemed *eiz kant*

lur. Ha Jakez, en eur c'houlen *mil lur*, merket ganthan var ar *bail*, en deuz c'hoant da ober eun taol laeroni.

Comb a zo bet nec'het braz gant respont ar Pab. Mez, evel ma ouzoc'h, digarez da fall ne vank morse. Setu aman petra en deuz lavaret va Aotrou :

— En eur c'hervel daou Eskob da Rom, emezhan d'ar Pab, ho sonj a zo ho zenna divar ho zron. Mad ! ar *C'honcordat* a zifen kement-man ouzoc'h, nemed en em gleout a rafec'h gant ar gouarnamant.

— Her gouzout a ran, eme ar Pab ; setu perag, mar kavan eo eun dever evidon disken an daou Eskob-man divar ho zron, em euz sonj d'en em gleout ganeoc'h, evel m'en em glev etrezho daou zen hag ho deuz sinet eur c'hontred, pe mar kirit, evel m'en em glev daou vignon.

— Daou vignon ! Birviken ne vo mignoniach etrezomp. Evidon-me ne glaskan nemed an distag, hag ar c'henta guella. Galvit ho kannad d'ar gear, ha me c'halvo va hini. Evelse omp sur da jom eb en em gleout.

Setu aze penaoz eo bet great an distag. Piou zo kaoz ? Livirit.

Kenta effed.

Disparti zo eta etre hor Bro hag ar Pab.

Lakeat omp hiviziken e renk an Turked ; rag, etouez holl Buisansou an Europ, n'euz nemed an Turked ha n'ho defe kannad ebed e Rom.

Lakeat omp eta er penn izella euz ar Puisansou. Beteg-hen, ar Franz e doa da velet var holl gristenien ar Zaō-Heol. Ho *frotektourez* e oa. Kement-se a re d'hor bro beza anavezet, karet, istimet. Ha breman ?...

N'hor beuz mui kannad ebed e Rom evit en em gleout gant ar Pab.

Breman eo an Aotrich pe an Almagh a gemero hor plas. Beteg-hen, drapo ar Franz e oa evit tud ar broiouze eun drapo hag a stoue dirazhan holl boblou an douar.

Ha breman ? Istim ebed mui evithan.

Ha setu aze ar c'henta dismeganz roet d'hor Bro gant Comb.

Hag eur seurt dismeganz a zo galvet gant Comb eur zoulajamant.

Penaos ? Eur zoulajamant, guelet ar vro o koueza er renk izella !

Diez braz eo kompren kement all.

Ar « C'honcordat ».

Daoust ha ma n'hor beuz kannad ebed mui e Rom, ar *C'honcordat* pe ar c'hontred a zo etre Rom hag ar Franz ne ket torret c'hoaz.

Ma ! Torret e vo, a lavar Comb.

Ha perag e vo torret ?

Abalamour an artikl kenta a zoug : AR RELIJION KATHOLIK, APOSTOLIK HA ROMEN A VO HEULIET ER FRANZ GANT LIBERTE.

Gant liberte ? Ar framasoned ne fell mui dezho lezel liberte gant den.

Daoust ha n'ho deuz ket straket ho daouarn, o kleout an depute framason Viviani oc'h anzao eo d'ar Relijion gatholik eo a glaske ober lamm.

Evelse 'ta, ar *C'honcordat* ne bado mui pell, ervez m'en deuz diskleriet Comb.

Ha penaos e vo dispennet ?

Daoust hag eun emgleo a vo great gant ar Pab ?

An dra-ze a ve ervez al lezen hag al lealded.

Ne ket eta evelse e vo great. Great e vo eul lezen, var a lavar Comb, hag el lezen-ze a vo diskleriet eo torret ar *C'honcordat*.

Ha ma zeufec'h ive da derri ar c'hontred zo etre ar Franz hag ar Pruss, a c'houlenne an Aotrou Brunetière digant unan euz *ar re ruz*.

— Ne ket ar memez tra, eme an *hini ruz*.

— Nan, eme an Aotrou Brunetière, ne ket ar memez tra. Ar *C'honcordat* n'en deuz evit he zifen nemed ar

guir hag al lealded, eleac'h ar c'hontred etre ar Pruss ha ni a zo difennet mad gant eun niver braz a zoudardet.

Evelse 'ta, mar klaskit affer ouz ar Pab, eo abalamour ar Pab n'en deuz ket a zoudardet d'he zifen.

N'oc'h eta krenv nemed e kenver an dud diarmet.

N'euz nemed an dud digalon hag a ra evelse !

Lezen Briand.

Evel ma leveremp, Comb en deuz sonj da ober eul lezen evit dispenn ar *C'honcordat*.

Al lezen-ze zo prest.

Renket eo a bell-ze gant ar framasoned. Hirio eo peurc'hreat gant eur rumm deputeed, hanvet da rei ho mouez evit dispartia an Iliz hag ar vro.

An hini zo karget da gas al labour da benn eo ar framason Briand.

Setu perag al lezen a zo hanvet « *Lezen Briand* ». Ervez ma konter, al lezen-ze a vo lakeat e dalc'h da viz Genver a zeu.

Setu aman an artikl a zo hano ennhan euz an disparti :

Artikl trede. — AZALEG AR MARE MA VO EMBANNET AL LEZEN NEVEZ-MAN, LEZEN AR C'HONCORDAT A ZO TORRET.

AZALEG AR MEMEZ MARE, NE VO MUI KONTRED EBED ETRE ROM HAG AR FRANZ.

Achu vo neuze. Ar framasoned ho devezo taolet ar Franz er vourverz, evel ma reaz guechall ar Revolution vraz.

Hag ar vourverz-se a zo hanvet gant ar *re ruz* « *mont araog !* »

Disparti etre an Iliz hag ar Vro.

An disparti ! a lavaro lod ; mez guella-ze. Neuze da viana an holl ho do liberte.

An Iliz a hello henvel eskibien ; an eskibien a hello henvel ar bersoned kanton, eb asant ar gouarnamant.

Ar gouarnamant n'en do mui netra da velet var ar Relijion : ar Relijion a vo libr.

Ouspenn-ze, muioc'h a amzer a jomo gant ar gouarnamant da glask mad ar vro.

Ar peoc'h a reno da vad. *An Iliz a vo libr euz he c'hostez, hag ar gouarnamant a vo libr euz he gostez.* Petra oufer kaout guelloc'h ?

— Mar plij, va zud !

Mad e kavfec'h eur gouarnamant dizoue, dreist-holl en eur vro evel ar Franz ; en eur vro hag a zo bet ato er penn kenta evit ar Relijion ?

Eur gouarnamant dizoue ? Mez n'euz ket er bed-man eur seurt gouarnamant.

Sellit el leac'h ma kerot.

An Almagn, Bro-Zaoz, an Aotrich, ar Beljik, ar Suiss, ar Rusii, ar Japon, kement bro 'zo a anzae ez euz eun Doue. Ouspenn-ze en holl broiou e peder an Aotrou Doue, pa vez eun dra benag a vraz.

En tu all d'ar mor, en Amerik, e veler pennou-braz ar vro o tigeri an « *Exposition* » dre ar beden.

NAN, N'EUZ KET EUR VRO EB A RELIJION ; N'EUZ KET EUR VRO EB A ZOUE.

Daoust ha ni zo braz aoualc'h, krenv aoualc'h, galouduz aoualc'h, eb kaout ezom ebed a Zoue ?

P'en deuz gouarnamant hor bro lezet Doue a gostez, pe da vad pe da fall eo eat an traou ?

Daoust ha mad eo e ve e penn ar vro judazed evel Comb ; hag eun dra gaer eo beza renet gant tud ha ne glaskont nemed diskar ?

Mez lezomp an dra-ze a gostez.

Lakeomp e ve eun dra vad gullet ar vro dizammet euz ar Relijion.

Ha kredi rit-hu e c'halfe ar framasoned rei liberte d'an Iliz ?

Ma ve guir ar gaou-ze ! Greomp, mar plij, eun taol-lagad var « *Lezen Briand* ».

Trubarderez.

Al lezen-man, na petra 'ta, a zeblant beza leun a vadelez. Prometi a ra deomp al liberte.

Selaout :

Artikl kenta. — AR REPUBLIK A GINNIG D'AN HOLL AL LIBERTE. LEZEL A RA AN HOLL LIBR DA HEULIA AR RELIJION.

Ardou, ha netra ken, hag e kaver ato gant ar framasoned.

E lezennou ar c'hanfarted-man, an artikl kenta a lavaro deoc'h : *liberte a zo evit an holl*. Hag en eil artikl e lennoc'h : *peb tra zo difennet*.

Ne lavaran nemed ar virionez. Guelit petra zo c'hoar-vezet gant ar Relijiused.

El lezen great evitho, e lennomp : ar re ho do c'hoant da veva asamblez a hello hen ober. Evit se n'ho do ezom ebed euz asant ar gouarnamant ; n'ho do ezom ebed ken nebeut da ziskleria ar pezh ho deuz sonj da ober.

Eul lezen gaer, mar d-euz unan, ne ket guir ? Ia, mez diouallit ! el lost ema ar flemm. Daou c'hant mil relijiuz pe leanez a zo bet stlapet euz ho ziez hag euz ar vro, evit beza great ho zonj da veva, peb rumm, en ho c'houenchou.

Nan, ne ket al liberte eo a glasker rei deomp. Ar framasoned ho-unan hen anzae.

« Red eo diskar ar Relijion gatholik, eme ar framason Andrieux, red eo he flastra, kousto pe gousto, ha pa rankfer, evit kement-se, lakaat an tan er vro. »

« Al labour a reomp, eme eur framason all, eo dis-planta ar feiz euz kalonou ar Fransizien. Evit dont a-benn, e fell deomp, bep bloaz, ober eul lezen nevez

benag eneb an Iliz hag eneb ar veleien. Hon labour ne vo ket achu ken hor bezo serret an holl ilizou. »

Selaouomp c'hoaz petra lavar eur gazeten frama-son : « Goude an disparti, e vo red taoler evez euz ar veleien. Red e vo miret ne iafe an niver outho var gresk ; red e vo ouspenn-ze d'ar gouarnamant veilla var danvez an Iliz. »

Ha setu aze al liberte !

Trubarderez, a lavaran deoc'h.

Al lezen nevez a c'hourc'hemenn al laeroni, ia al laeroni.

Al laeroni.

Digorit frank ho taoulagad hag ho tiousskouarn :

Artikl eil. — AR REPUBLIK NE RO NETRA EVIT DISPI-GNOU AN ILIZ. — NE ANAVEZ KET MINISTRED AR RELIJON.

Dalc'hit sonj mad euz ar c'homzou-ze. Bremañk ni ho c'havo c'hoaz.

Artikl pemped. — AZALEG AR C'HENTA A VIZ GENVER, GOUDE MA VO EMBANNET AL LEZEN NEVEZ-MAN, AR GOUAR-NAMANT NE ZISPIGNO MUI NETRA VARDRO AN ILIZOU, NE RAI MUI PAEAMANT EBED D'AR VELEIEN.

Aman ema al laeroni.

Ha setu aman perag.

En amzer goz, an dud a iliz ne oant ket paet gant ar gouarnamant.

Hon tud koz a bourvee da ezommou ho beleien, a roe dezho peadra da veva, a leze gantho, dre desta-mant, arc'hant ha douarou...

Gant an arc'hant-se, ar veleien a veve ho-unan hag a zikoure ar beorien da veva. Savet ho doa hospitaliou evit ar re glanv, tiez a repoz evit ar re goz, tiez evit an emzivadad paour.

An traou-ze holl a velet e pevar c'horn ar Franz, araog ar Revolution.

Ar Revolution a jenchaz doare d'an traou. Dougen a reaz eul lezen d'an eil a viz Du 1789, ha dre al lezen-

ze, « *madou an Iliz a oa lakeat etre daouarn ar gouar-namant* ».

Koulskoude evit diskouez e oa e guirionez ar ma-dou-ze d'an Iliz, ar gouarnamant a gemere ar garg :

— *Da bourvei da ezommou an ilizou ;*

— *Da baea ar veleien ;*

— *Da gemer soursi euz ar beorien.*

Komprenit mad : ar gouarnamant *en em gorge*, da lavaret eo : a zivize rei eun dra benag e plas ar pez a gemere.

Ober a re eur c'hontred etre an Iliz hag hen. Dre ar c'hontred-se, an Iliz a lake he danvez etre daouarn ar gouarnamant, hag ar gouarnamant, d'he dro, en em gorge da bourvei da ezommou an ilizou, da baea ar veleien, da entent euz ar beorien.

KEMER EVIT REI : setu aze var betra eo diazezet paeamant ar veleien.

Ne ket eta eur baeamant hag a hell ar gouarnamant rei pe jom eb rei. Eur garg eo, eun *rent* eo, dleet divar an arc'hant a lake an Iliz etre daouarn ar gouarnamant.

Ia, paeamant ar veleien n'eo nemed an interest divar ho arc'hant. Ha chom eb paea an interestou-ze a zo eul laeroni.

Ma iafec'h da eur *bank* da blasa mil skoed, ha ma ve prometet deoc'h tri de gant, petra lavarfec'h ma velfec'h ar gouarnamant oc'h embann an *disparti*, o terc'hel ganthan ho mil skoed, hag o chom eb paea deoc'h ho interestou.

Lavaret a rafec'h : an *disparti*-ze a zo eul laeroni, hag ar gouarnamant a zo eul laer.

Ma ! Setu ive ar pez a leveromp-ni, pa zeu ar gouar-namant da lavaret deomp ne baeo mui ar veleien.

En eur lavaret an dra-ze, ar gouarnamant a zisnac'h he zinatour ; derc'hel a ra ganthan eun arc'hant ha n'eo ket dezhan. Eul laeroni a ra, en eur jom eb paea he zle.

Beteg-hen, an dle-ze zo bet anevezet ato gant ar vro. Epad ar Revolution vraz zoken, e oa eul lezen (13 Ebrel 1790) hag a zouge : « *Etouez an dispignou great gant ar gouarnamant, e vo lakeat a gostez an*

arc'hant zo red evit pourvei da ezommou ar Relijion hag evit paea ar veleien. »

Hag er bloavez varlerc'h (1791), setu aman ar pezh a velomp el lezen :

Artikl eil. — AN ARC'HANT NESESER EVIT PAEA AN DLE KEMERET GANT AR VRO A RANKO ATO BEZA VOTET. PAEAMANT AR VELEIEN A ZO EUL LODEN EUZ DLE AR VRO ; AR BAEAMANT-SE N'HALLO MORSE BEZA TENNET DIGANTHO.

Setu aze eun dra hag a zo sklear, eun dra embannet gant ar Revolusionerien goz ho-unan : PAEAMANT AR VELEIEN A ZO EUN DLE EVIT AR VRO.

Ha setu perag, pa oa sinet ar *C'honcordat*, ar gouarnamant ne varc'hataz ket evit sina an artikl pevarzeg ; he-man a zouge : AR GOUARNAMANT EN EM GARG DA REI D'AN ESKIBIEN HA D'AR VELEIEN EUR BAEAMANT DEREAD.

Euz he gostez, ar Pab a zisklerie n'en dije morse klasket lakaat freuz etouez ar re e oa eat gantho danvez an ilizou.

Kement-man a oa c'hoaz eur c'hontred. Ar gouarnamant, euz eur perzh, a bromet rei interest ; hag euz eur perzh all, an Iliz a ro aotre d'ar gouarnamant da denna implij euz he madou.

Setu perag, eur vech c'hoaz, po zeu ar gouarnamant da baea ar veleien, ne ket eur prezant a ro dezho.

Nan ! paea ra he zle, ha netra ken. Evel eun noter hag ho peuz arc'hant plaset en he vuro, pa ro deoc'h hoc'h interestou, ne ket nag eur prezant nag an aluzen a ro deoc'h : ne ra nemed paea he zle, *en eur rei deoc'h* AL PEZ ZO DEOC'H.

Unan eta a zaou. Mar teu ar gouarnamant da jom eb paea an interestou, eo eun dever evithan paea ar « *principal* ».

Oh ! Bezit sur ne baeo ket ar « *principal* ».

Ma ! Neuze ar framasoned, o terc'hel gantho « *principal* » hag interest, a zo goasoc'h eged ar Revolusionerien guechall.

Ar re goz da viana e vije bet mez gantho disnac'h ho dle. Eleac'h framasoned hon amzer-ni a zeui, dre ho lezen nevez, d'en em lakaat e renk AL LAERON TOUET.

GOAZ a-ze d'ar beorien :

Kement lezen ho deuz great ar framasoned a zo bet eneb ar beorien.

Al lezen-man a zo eneb dezho, evel al lezennou all.

Kleout a rear aliéz lavaret : pae ar veleien eo arc'hant an holl. Ma ! ne ket just e ve paet ar veleien gant arc'hant an holl, gant arc'hant tud ha ne ieont morse d'an iliz. Ar re a ia var dro ar veleien eo mad dezho ho faea !

Guir aoualc'h an dra-ze, a lavaro lod.

Ne ket guir, a lavaran-me. Diskouezet hor beuz eo paeamant ar veleien eun *dle* kemeret gant ar vro. Eun dever eo eta, evit ar vro a-bez, paea an dle-ze, evel ma paez an dleou all.

Rezoniou all e kavfemp c'hoaz, evit diskouez eo eun dever evit an holl paea ar veleien.

Selaouit, Yann. Pet guech oc'h-hu bet en *Opera*, e Paris ?

Guech ebeb ; ne iin morse zoken.

Na me ken nebeut, Yann. Ha koulskoude hon arc'hant-ni, evel arc'hant ar re-all, a ia da zikour paea kanourien ha kanourezed an *Opera*.

Ha perag e paeomp-ni kanourien ha kanourezed ha ne glevimp morse ?

Abalamour zo kalz tud hag a ia d'ho zelaou gant plijadur.

Abalamour c'hoaz, ma ne baeve nemed ar re a ia di, ne ve ket arc'hant aoualc'h. Ar ganourien hag ar ganourezed a varvfe gant an naon hag an *Opera* a rankfe serra he zor.

An holl a baez, evit dere'hel dor zigor ; an holl a baez, evit ober plijadur da lod.

Mad ! Yann, pa vez hano euz ar Relijion, ne ket euz a blijadur ebken a zo hano. Ar Relijion zo eun *ezom* evit kalon an den, eun *ezom* evit koustianz ar c'hristen.

Ia, kristenien a villerou, a vilionou ho deuz *ezom* euz eun iliz evit pedi, *ezom* ho deuz euz eur beleg evit lavaret an oferen, evit ho eureuji, evit badeza ho bugale, evit enterri ho zud varo.

Ma rankfe ar gristenien-se chom eb a ilizou, eb a veleien, ho buez ne ket eur vuez e ve.

Ha koulskoude an holl barrezioù n'ho deuz ket peadra evit pourvei da ezommou an iliz hag ar veleien.

Red eo eta e teufe *an holl* d'en em zikour evit miret euz an ilizou da veza serret, evit miret euz ar veleien da jom en dienez. Red eo, en eur ger, e ve paet ar veleien gant *ann holl*, memez gant ar re ne zarempredont ket an ilizou.

Ma ne baefemp nemed ar pezh a zervij deomp, petra c'hoarvefe ?

Ne iafe mui netra en dro : ar vro a ve evel maro. Lod ne rafent ket ho devezioù hent braz, abalamour ne valeont morse var an hent braz ; lod all ne baefent ket ar vistri skol, abalamour n'ho deuz ket bugale da gas d'ar skol ; lod all na iafent ket d'ar zervij abalamour n'ho deuz tamm douar da zifen euz enebourien ar vro...

En eur ger, ar vro a gouezfe en he foull.

Arabad eo dizonjal eo tud eur vro etrezho evel tud euz ar memez famill, evel memproù euz ar memez korf. An daouarn ne zrebont ket, ha koulskoude petra c'hoarvefe ma chomfent eb kas an tamm d'ar ginou ?...

Etouez *guirioù an dud* a zo unan, dreist ar re-all :
AL LIBERTE.

Red eo d'ar gouarnamant ober kement zo neseder, evit ma chomo al *liberte* gant peb den.

An dra-man a veler er broioù all. An Almagh a zo eur vro brotestant, ha koulskoude a baez beleien gatholik evit he zujidi katholik. En Itali, e velomp ar gouarnamant o kreski ho fae d'ar veleien. Perag ? Oh ! ne ket abalamour d'ar veleien ho-unan ; mez abalamour tud ar vro a zo re baour evit maga ho beleien.

Er Franz er c'hontrol, ar framasoned a lavar :

Goaz a-ze d'ar re baour ! Pa n'hellont ket paea ho

beleien, ra vevint ha ra varvint eb a veleien, eb a relijion, eb a Zoue !

Ar re binvidig a hello ato en em drei. Ni ministred, ni deputeed, ni gavo ato seurezed d'hor zoursial, mar bezomp klanv.

Ar beorien avad eo re vad evitho lakizien ha laiked. Goaz a-ze d'ar beorien !

C'hoaz al laeronsi !

O chom eb paea ar veleien, ar gouarnamant a jom eb paea he zle. Goasoc'h a ra c'hoaz : LAEREZ A RA HON ILIZOU.

Setu aman petra lennomp el lezen nevez :

Artikl unnegved. — AN ILIZOU, AR PRESBITALIOU, AR ZIMINERIOU..... A ZO D'AR GOUARNAMANT PE D'AR GOMMUN.

Kement-se zo eul laeronsi, ha netra ken.

Hon tud koz ho doa savet ilizou gant ho arc'hant ho-unan. D'ar *Revolusion*, an ilizou-ze zo bet lakeat etre daouarn ar gouarnamant, *gant ar garg* da bourvei da ezommou ar veleien.

Hirio ar gouarnamant a glask en em zizamma euz ar garg en deuz kemeret, hag a zalc'h ganthan an ilizou !

Dezhan int, var he veno !

En holl broioù, an dra-ze a zo galvet : LAERONSİ.

« Hag e guirionez, a lavar eur ministr koz, an Aotrou Emile Ollivier, an ilizou a zo d'ar gatholiked. Ho zenna digantho a zo ober eul laeronsi. »

Hag an ilizou, savet a nevez zo : da biou e vezint ?

D'ar gouarnamant pe d'ar gommun, m'ho deuz ar re-man *sikouret* ho zevel !

Ha setu penaoz, me 'm euz roet KANT MIL LUR, evit sevel eun illiz nevez em farrez, hag ar gommun e deuz roet KANT LUR da zikour, hag an iliz a vo d'ar gommun ! HA ME RANKO KOLL VA C'HANT MIL LUR !

Al lezen eo.

Ma ! galvit an dra-ze : *lezen* pe *zilezen*. Me lavar-me : kement-se zo eul LAERONSI euz ar goasa oufer da velet.

Eb gaou ebed, e heller lavaret ho deuz an dud fidel roet *nao* var *zeg* da zevel an ilizou.

Hag ar gouarnamant en deuz ar « *front* » da lavaret eo an ilizou dezhan.

Setu aman c'hoaz eun haillonerez all.

Eur pennadig zo, meur a iliz zo bet savet, *eb m'en defe roet ar gouarnamant eul liard toull* da zikour.

Hag ar gouarnamant ne bermete ket digeri an ilizou-ze, nemed lakeat e vijent e hano ar gommun.

Kentoc'h evit guelet ho ilizou o chom serret, ar gatholiked a lakea an ilizou-ze e hano ar gommun.

Ha neuze ?

Neuze, pa vo votet al lezen nevez, ne vo ket kavet marteze eun iliz dre gant hag a jomo gant ho ferc'hen, da lavaret eo, gant ar re ho deuz ho zavet.

Da biou e vezint ?

D'ar gommun, p'e guir emaint e hano ar gommun !

Biskoaz-jamez n'euz klevet hano euz eur seurt taol-laër !

Ha neuze ?

Ha neuze, mar chom an elektourien eb sevel ho mouez, ma lezomp an deputed da voti a-du gant Comb, a-benn bloaz Comb a zougo al lezen-man :

An *eskibien* a dle kuitaat ho *eskobtiou*, ar *veleien* ho *fresbitaliou*.

An *holl ilizou katedral*, an *holl zimineriou*, an *holl ilizou parrez* a vezo serret *eb dale*.

Pe ma ne fell ket deoc'h e vent serret, neuze, va zud vad, e rankoc'h ho *fermi* digant ar gouarnamant.

Mantruz eo, ne ket guir, rankout *fermi* digant ar gouarnamant.

Mantruz eo, ne ket guir, rankout *fermi* eun dra hag a zo deoc'h, *dre vir*.

Ha piou a hello ho fermi ?

Selaouit.

Al lezen nevez a ro urz d'an dud fidel d'en em unani, evit pourvei da ezommou ho ilizou.

Ha ma karfe an dud fidel *prena* ho ilizou ?

Difen a vo. Ho *fermi* a hellint, nan ho *frena*.

N'hellint ket ober ouspenn deg vloaz bail.

Epad an deg vloaz kenta, ar gouarnamant a fermo d'ar gatholiked, ha d'ar gatholiked ebken — m'ho deuz c'hoant ar re-man da fermi.

Abenn deg vloaz avad, ar gouarnamant a fermo d'an neb a garo : d'eun hostiz, d'eur marc'hadour kezeg..... Abenn deg vloaz, an ilizou-ze, savet gant ho tud koz, a hello — ervez al lezen nevez — beza lakeat da ober magazin vin, hostaliri, marchosi !.....

Petra velimp varc'hoaz.

Setu aman petra velimp.

Azaleg an devez kenta ar bloaz, goude ma vo votet al lezen nevez :

1° Hoc'h ilizou, ho presbitaliou ne vezint mui deoc'h ; d'ar gouarnamant eo e vezint.

2° Epad an deg vloaz kenta, e vo *dao* d'ar gouarnamant — mar kirit — fermi deoc'h an ilizou.

3° Goude an deg vloaz-se, ar gouarnamant a hello ho fermi d'an neb a garo.

Setu perag :

Azaleg an devez kenta ar bloaz 1906, mar kirit kaout eur beleg en ho parrez ; mar kirit kaout eun iliz evit kleout an oferen, badeza ho pugale, ober enterraman-chou gant ho tud varo ; MA NE FELL KET DEOC'H BEVA HA MERVEL EVEL CHAS, e rankoc'h :

— En em gleout evit paea ti d'ho peleg hag he vaga ;

— Paea hoc'h iliz.

Setu perag c'hoaz :

Goude deg vloaz, ma fell d'ar gouarnamant, e rankoc'h :

— Sevel eun iliz nevez pe kleout an oferen en eul lochen, evel d'ar Revolution vraz.

— Paea ha maga ho peleg;

— Paea ti d'he loja.

Nag a zispign, nag a vizou, nag a drubuill !

Goasoc'h a c'hoarvezo !

Ho peleien a varvo tro pe dro.

Eur vech maro beleg ho parrez, piou a zeuio en he blaz ?

Hini ebed marteze, rag ar veleien a zo skoliet ha savet er zimineriou.

Hogen ar zimineriou, evel an ilizou, a vo serret.

Piou benag ho do c'hoant da gaout beleien, a ranko eta ferma ti da skolia an abaded.

Hag an Eskibien ? Piou a bourveo d'ho ezommou, penaoz e iai en dro afferiou an Eskopti ?

Gant sikour an dud fidel.

Varnoc'h eta, va zud vad, varnoc'h paizanted, labourerien, micherourien — ha c'hui dija sammet gant ar rollou — ,varnoc'h eo e kouezo kargoù nevez.

Be 'zo meur a gartel, er vro, hag a zo re baour evit sevel kement all.

Er c'harteriou-ze 'ta, *an dud a vo kondaonet da veva ha da vervel eb a Zoue ; da veva ha da vervel evel chas.*

Al loden vrasa euz ar Franz a zeui da veza henvel euz ar broiou sauvaj. Ne vo-beleg ebed e meur a leac'h. Unan benag a rai eun dro aman hag ahont, evel ma rear er broiou gouez. Ha setu tout.

Ha c'hoaz e leverer deomp e vo liberte !

Setu aze, elektourien, e pe stad ho deuz lakeat hor bro lod euz an deputeed, ar re a zo a-du gant Comb.

Daoust hag evit eur seurt labour divalo eo ho peuz roet ho mouez dezho !

Nan. Tromplet oc'h bet gantho.

Lavaret ho deuz deoc'h ne glaskent ket affer euz ar Relijion.

Hag hirio ho gueler o serra an ilizou, o tenna ho fae digant ar veleien.

TRAÏTOURIEN INT !

Hag ar re-all ?

Evel ma velomp, an *hanter* euz ar parreziou, er Franz, n'ho do ket peadra da vaga eur beleg na da fermi eun iliz.

Hag an *hanter all* ?

Ar re a hello fermi eun iliz a vo goasoc'h ho doare eged hini ar verourien. Dezho a vo an iliz da rapari ; dezho d'he zevel a nevez mar teu da goueza en he foull ; dezho d'he *assuri* eneb an tan-goall, eneb ar gurun.

Erfin :

TENNET A VO DIGANTHO VAR AN DISTERRA DIGAREZ.

Setu aze mizou kalet, m'her promet deoc'h. N'euz nemed ar re a anavez an traou hag a oar pegement a goust derc'hel eun iliz dindan renabl !

Ha c'hoaz, piou a glasko kaeraat he iliz, pa zonjo e vo tennet digant-han, marteze antronoz men do he c'hempennet !

Al liberte.

Da viana eur vech m'ho do fermet ho iliz, ar gatholiked a vo libr !

Liberte ebed !

Ar *c'honseil* karget da zoursial euz madou an iliz n'hallio plasa he arc'hant nemed e kefiou ar gouarnamant.

N'hallio ket kaout muioc'h a arc'hant ebed ar peza zispign bep bloaz.

Ma tigouez eun dispign braz benag, mar kouez an tour, an doen... goaz a-ze.

Ha m'en defe c'hoant eun den mad benag da rei eur zoum d'an iliz ?

A rankfe an arc'hant-se beza lakeat e kefiou ar gouarnamant.

Ha pa vo c'hoant d'he zispign ?

E rankor goulenn konje. Ha mar fell d'ar gouarnamant, ar gatholiked a ranko chom eb iliz, hag int-hi arc'hant oualc'h da zevel unan.

Ne ket eun druez !

Ar falla lakipod zo var an douar a hello sevel ti ha ti all, derc'hel hostaliri, ober sal da zansal... ha me oar... hag ar gristenien n'hallint ket sevel eun iliz evit kleout an oferen, evit pedi !

Nan.

Ha setu aze koulskoude ar pezh a c'halv ar framasoned amzer al liberte !

Hag ar veleien :

An dud fidel n'o do ket eta al liberte er pezh a zell euz ho ilizou.

Hag ar veleien ?

Ken nebeut.

P'ho do c'hoant da ober eun offiz benag, e vezint *surveillés* gant ar poliz.

P'ho do c'hoant da ober eur prosesion, e rankint kaout konje digant ar gouarnamant.

Goasoc'h a zo.

Amand ha prizon.

Evit piou ?

Evit daou seurt tud.

Da genta. — Evit ar re a glaskfe lakaat eun den, *en despet dezhan*, da zikour pourveir da ezommou an iliz : *pemp kant lur amand, tri miz prizon*.

D'an eil. — Evit ar re a lakafe reuz en iliz : *tri c'hant lur amand, c'huec'h devez prizon*.

Selaouit mad.

Eur beleg a glasko lakaat eun den da rei sikour d'an iliz : *tri miz prizon* !

Eul lakipod a rai reuz en iliz, a viro euz *daou vil den* da gleout an oferen : *c'huec'h devez prizon* EBKEN !

Kaerra justiz !

Ha c'hoaz al lakipod ne vo kondaonet nemed dont a rafe en iliz da ober he reuz. Mar chom e kichen an or, *en dianveaz*, e hello ioual, iudal, blejal, ober a bep seurt *charivari* : netra ne vo great dezhan.

Goapaat e hello an dud var an hent, lakaat freuz er prosesionou, ober n'euz forzh pe seurt arriez dirag eun enterramant : netra n'en do.

Hag eur beleg a lavaro da eur micherour : me ho kemerfe da labourat, mar karfec'h rei pevar real da zikour rapari an iliz :

Tri miz prizon ha pemp kant lur amand !

Ac'hanta, goazed, petra livirit euz ar justis-se ?

Ar politik.

An asambleou evit an offisoù a zo lakeat, gant al lezen nevez, e renk an holl asambleou. Konje a dle beza eta da lavaret enno ar pezh a greder zo mad da lavaret.

Pe seurt konje ?

Selaouit :

TRI MIL LUR AMAND HAG EUR BLOAVEZ PRIZON d'ar beleg en do komzet eneb eur ministr, eun depute, eur gard-champêtr.

Euz eur perzh, ar beleg ne ket paet gant ar gouarnamant. Euz eur perzh all, eun amand spountuz e pako, mar d-eo re hir he deod.

Daoust, da viana, hag en em zifen a hello ?

Araog beza kondaonet, an dud all a vez selaouet.

Ar beleg a vo kondaonet, eb ma hello en em zifen. Eun dra all a zo c'hoaz.

Dexer ar beleg eo lenn, er gador zerrmon, liziri Hon Tad Santel ar Pab, liziri an Aotrou'n Eskob.

Mar komz al liziri-ze euz eun den a bost, ar beleg a vo kondaonet.

Kondaonet evit ober he zever ?

Ia, ha var ar marchad, ar gouarnamant a hello serra dezhan he iliz.

O LIBERTE !!!

Prosesionou. Enterramanchou.

AR PROSESIONOU HAG AN ENTERRAMANCHOU N'HALLINT
BEZA GREAT NEMED GANT ASANT AR MEAR.

AR C'HLEIER A VO SONET ERVEZ MA PLIJO GANT AR
MEAR.

Setu achu d'ar prosesionou er parreziou zo ennhou
eur mear framason !

Peb tra a ranko beza great ervez ma plijo gant an
aotrou.

Ar billed enterramant ne vo mui aoualc'h ; red a vo
kaout asant ar mear evit enterrin ho tad, ho mamm, ho
pugale gant pedennou an iliz.

Mar d-eo ar mear hoc'h adversour, goaz a-ze.

Enterramant « *civil* » a vo neuze.

Setu aze al liberte !

Evit ar c'hleier e vo ar memez tra. Goude beza fer-
met iliz ha kleier, e rankoc'h c'hoaz kaout konje da
zon ar c'hleier-ze.

Na kaerra tra !

Kroaziou hag Enseignou.

Difen da zevel eur groaz var ho touarou, e korn
ho parkeier. Difen zoken da lakaat imaj ar Verc'hez
azioc'h ho tor, *mar d-ema an imaj-se a vel d'an holl*.

Evel ma ve eun dizenor gullet ar groaz dirag an
daoulagad ; evel ma zeufe ar groaz da zalla ho daou-
lagad d'an dud.

Nan, kroaz ebed mui nemed en iliz pe er vered.

Ha c'hoaz, er vered, kroaz ebed nemed var ar be-
ziou.

Piou benag en defe ar « *front* » da zevel eur groaz
e kreiz ar vered, eur groaz evit an holl, hennez a ve
kondaonet da bemp kant lur amand.

O tristedigez !

Petra da ober ?

Setu aze petra zo prometet deomp eb dale. Setu
petra c'halver an *disparti etre an Iliz hag ar vro*.

Ken mantruz eo kement-se, ma veler lod euz an
deputeed ho-unan o kemer aoun hag o krena.

Comb, evit guir, a ra embann n'euz ezom ebed da
gaout aoun. Var he veno, pae ar veleien a vo lezet
gantho hed ho buez ; an ilizou ne vezint ket serret.....

It da gredi.

Ar memez promesaou kaer a re d'ar relijiused. Ha
gullet a rit petra zo c'hoarvezet.

Nan, netra vad n'hor beuz da c'hortoz.....

Eo, evelato.

Elektourien,

Eo, mad e iai an traou, mar kirit.

Mar kirit miret euz ar freuz, komzit freaz euz ho
tepute.

Ho tepute ne ket eur mestr eo evidoc'h : ho plas eo
a zalc'h er Gampr ; evit difen hoc'h interest eo ho
peuz her c'haset di.

Guir ho peuz holl da lavaret dezhan petra fell deoc'h
e rafe.

Grit dezhan da gleout ha da entent ne fell ket deoc'h
e ve touchet euz ar Relijion, euz ho kreansou, euz feiz
ho tadou. Diskuezit dezhan a-grenn e fell deoc'h e ve
kemeret guelloc'h soursi euz alferiou ar vro.

Livirit dezhan ne fell ket deoc'h e tremenfe ar vinis-
tred ho amzer oc'h ober brezel d'an Iliz ha da gement
zo mad.

LIBERTE ! LIBERTE ! Goulennit ma ne vo ket mou-
get al liberte.

E Bro-Zaoz, araog ma vez votet eul lezen, an holl a

boagn evit klask pe vad pe fall a dennfe al lezen-ze var ar vro. Ma kaver eo fall al lezen, an holl en em zao en he eneb, hag an deputeed a rank chom sioul.

Er Franz, an traou ne ieont ket evelse. Ni jom hanter-gousket. Eur vech great an torfed, votet al lezen fall, e klever lavaret : *eun druez eo !* Hag achu tout.

Diouallomp mui da jom kousket. Varzao ! varzao ! kentoc'h hirio eged varc'hoaz. Diskuezomp omp kristenien, tud a feiz krenv ; diskuezomp a zo ato goad dindan hon ivinou hag eur galon en hor c'hreiz.

Greomp an arao var eul lezen judaz hag a dennfe diganeomp al liberte, ar veleien, an ilizou.

Diskuezomp d'ar bobl emae o klask he gas da goll.

Siouaz dezhan ! ne vel ket da beleac'h e klasker he gas !

Sao, popl kristen, dihun, digor da zaoulagad. Sao ha sao buan da zifen da ilizou, da aoteriou, da vro.

Ho difen a renkez kousto pe gousto.

Anez, marteze, ar Franz a ve dismantret ; anez, eb dale, he guelfer diskaret, henvel euz eur c'horf maro !...



